



golo treset gant Herve Dikelou

- Mari da veure Pask
- 4,5,6 sul an Amzer Fask
- Ar Yaou-Bask
- 7vet sul an Amzer Fask
- Pedenn-emzilezel.

ebrel-mae 1988

EMVODOU KRISTENION E BREZHONEG

Miz ebrel, disul 17, e ROSTRENEN, gouel brezhonek ha kristen aozet gant BELEIEN BREIZH.

Miz ebrel, d'ar 16 en endervezh, e Minihi Levenez, kaozeadenn diwar-benn "Sevenadur ha Feiz"; d'an 23 ha 24 a viz ebrel, retred verr, "Bevañ gant ar C'hrist savet da vev".

Miz ebrel, disul 24, pardon ar vrezhonegerion e KER ANNA Bro-Wened. Baleadeg adalek LANDAOL da 8 eur. Emvod EMGLEV AN TIEGEZHIOU.

Miz ebrel, disul 24 d'abardaez ha dilun 25, e ti-person KISTINID (56310 BUBRI, pg 97397115), Pedenn an Iliz ha pennadoù studi gant KRISTENION BREIZH. An Oferenn d'al lun.


Miz mae, disul 22 (Pantekost), e PLOUNEOUR-MENEZ, emvod KRISTENION BREIZH, ha dilun 23 pardon chapel sant Dewi, gousperoù en enor d'an Itron Varia m'eo gouestlet ar bloavezh-mañ dezhi.

Miz mezheven, disul 26 ha dilun 27, e KISTINID, emvod reoliek KRISTENION BREIZH.

Miz gouhere, adalek dilun 4 enderv betek disadorn 9, e Ti Parrez KISTINID (56310 BUBRI, pg 97397115), staj EMGLEV AN TIEGEZHIOU.

Miz gouhere, e Minihi Levenez, staj brezhoneg, eus ar 4 d'an 9; retred eus an 13 d'ar 17.

Miz eost, en IWERZHON, ha peurgetket e manati Gleann Staile, Maigh Rua (Prad ruz) 16 km eus Kêr LUMNEACH, Kendalc'h Kristen Etrekeltiek, etre ar 24 hag an 31 a viz eost. Porzh-mor Rosgo d'ar 24 da 13,30, Corcaigh d'ar 25 da 9 eur. Dont en-dro dre Corcaigh dimeurzh 30 da 18 eur evit degouezhout e Rosgo dimerc'her 31 da 10 eur. Priz an droiad, treizh, bod ha boued war-dro 2.000 lur gall. Skrivañ da Paol Kalvez, Lez Hinog, 35380 PAIMPONT (pg 99 07 85 03), ar c'hentañ ar gwellañ, ha ha kas 500 lur arrez.



ROUANEZ AN NEÛV,
LEVENEZ !

Leve
meurzh 1988

Sul kentañ ar bed nevez, o treuziñ egorioù ha mogerioù, e lamm Jezuz davet e Vamm. Evit doare, e chom sioul an avieloù war an emziskouezhadeg-se, peogwir e lavaront dimp ez eo bet grataet d'ar Vadalen ar weledigezh kentañ eus hor Salvat dasorc'h-et. Hogen Jezuz ne c'helle ket chom hep mirout d'e Vamm ar c'hentañ diskouez eus e c'hlod. D'ar Vadalen, ar bec'herez, hi koulskoude pardonet, e lavaro: "Arabat deoc'h stekiñ ouzhin!". Tomaz avat en deus gallet silañ e zorn e gouli e gostez.

Penaos 'ta n'o defe ket en em vriatet ar Mab hag ar Vamm gant ur stardadenn veur? Lakaat a rahi he muzelloù war bep gouli skedus ar C'horf holl-c'hlozet. Un "engav dilavarus" maz eus unan hag a roe dudi da Santez Tereza a Avila ha da Sant Ignaz a Loyola.

An hini he doa degemeret he Bugel marv etre he divrec'h a zo bet, sur-mat, ar c'hentañ ouzh E stardañ bev-buhezek war he c'halon. Penaos eo bet amprouet feiz Mari d'ar Sadorn Santel? Pe-lec'h edo ar Werc'hez pa ziskenne Jezuz d'an iferioù? Morse n'he deus diskredet. Anat eo n'eo ket deuet-hi d'ar bez da valzamiñ Jezuz. Ha n'eo ket dezhi e c'hellfe an ael lavarout: "Perak e klaskit-c'hwi etouezh ar re-varv an Hini a zo bev?"

War-c'hed eus gwere-laouen Pask, e chome sonn ar gred enni. Digenvez an holl, hi avat a zo an Iliz a-bezh o krediñ e Trec'h Jezuz. Feiz an Iliz ha deus en em repuet enni. Goude taol Gwener-ar-Groaz, piv 'ta a gredfe c'hoazh ez eo eñ Mab Doue? Piv a-nez ar Werc'hez Vari? Divrall eo chomet he feiz dezhi; hi hepken he deus miret ar feiz. Ur feiz dam-heñvel, dindan an Englev Nevez, ouzh hini Abraham, dindan an Englev Kozh, rak "eñ a gredas, spi ennañ pa ne oa spi ebet". Er feiz eo he deus bevet Mari kement a zo c'hoarvezet ganti. N'he deus ket kredet hepken, pa oa dav lavarout ya pe nann da Gabriel.

Yann-Baol II, en e gelc'helenn REDEMPTORIS MATER a zanevell, a-dreuz an Aviel, "pirc'hirinerezh a feiz" Mari, e dennadoù, betek mare an amproadenn veur, dirak ar groaz, dislavar, evit ur gwel, eus ar

Rouantelezh kemennet. Ur vaouez eta n'he deus ket diskredet, da abardaez Gwener-ar-Groaz. Keit ha m'eo bet padet ar bez, holl feiz ar bed a zo bet dalc'het en he c'halon. Ar feiz-se eo road bras Pask, ar feiz eo gras an Dasorc'hidigezh. Ha Mari eo an hini hor c'has d'ar feiz-se. Hi eo hag a starta ar feiz, en hor c'houlzioù-ni. Feiz hag a zo bezañ torm ouzh hinienn Jezuz Krist marv ha dasorc'het. Feiz hag a zo entuañ gant ur gelennadurezh a zegemeromp digantañ, peogwir e garantez a fell dezhi peurlenuniañ hor c'halon, met ivez, war an hevelep tro, sklerijen-nañ hor meiz.

Krouadur ebet n'en deus muioc'h eget e Vamm perzhiet c'hwek ha don e laouenidigezh an Aotrou Krist savet da vev. Hag an Iliz he deus savet ur verrganenn hag a ro tu dimp d'en em unaniñ gant le-venez neñvel an Itron Varia: "Rouanez an neñv, leve-hez! allelouia! Peogwir eo savet bev eus ar bez, allelouia! Hervez e c'her, frouezh da gostez, allelouia! Ped evidomp hon Doue, allelouia!"

Ped evidomp Doue, dimp da c'hellout degemerout an Dasorc'had, er feiz. N'eus den ebet hag a c'hellfe e-giz ar Werc'hez hor c'has da Jezuz.

Youenn Troal.



Pezh a lavaras d'e Vamm
Jezuz dasorc'het...

"Deuet eo pep tra da benn, o Mamm! Bremañ eo arabat dit gouelañ ken, en abeg d'az Mab. Peursevenet eo an amproudigezh. C'hoarvezet eo an Dasprenidigezh. Mamm, trugarez dit diwar vezañ va c'hoñsevet, va savet, va skoazellet da-geñver ar vuhez hag ar marv.

Merzet am eus da bedennoù o tont davedon. Va nerzh ez int bet e-kreiz va glac'har, va heuliet o deus e-doug va beaj war an Douar hag en tu-hont d'an Douar. Ganin ez int deuet ouzh ar Groaz hag e-barzh al Limboù. Bez e oa anezho an ezafis a-ziaraok d'ar Beleg-Meur hag a oa o vont da c'hervel e servijerien, a-benn o degas d'an Templ na da ket da get, e-barzh va Nefiv. Ganin ez int deuet er Baradoz, o tont a-ziaraok, e-giz ur vouezh-a-el, da ambrougadeg an dasprenidi heñchet gant an Dasprener, evit saludiñ an Trec'hour o tistreiñ d'e Rouantelezh. Klevet ha gwellet ez int bet gant an Tad hag ar Spered, hag o deus mousc'hoarzet ganto, evel gant ar vleuriñ gantañ hag ar ganenn c'hwekaf bet ganet er Baradoz. Anavezet ez int bet gant an Uheldadoù hag ar Sent nevez, gant ar re nevez, ar re gentañ eus va Jeruzalem-me na Me a zegas dit, Mamm, o zrugarekadennoù, war un dro gant pok ar gerent hag o bennozh hag hini Jozef, da bried-ene.

Emañ an Nefiv en e bezh o kanañ e hozanna dit-te, va Mamm Santel a Vamm! Un hozanna hag a chom hep mervel, unan n'eo ket gaouiat, evel an hini a zo bet roet din, un nebeut deizioù 'zo.

Bremañ ez an da gaout an Tad, gant va gwiskamant denel. Gwelout a rank ar Baradoz an Trec'hour en e wiskamant a Zen, m'en deus gantañ trec'het Pec'hed Mabden. Met da-c'houde e teuin c'hoazh. Dleet eo din startaat er Feiz ar re na gredont ket c'hoazh hag o deus ezhomm da grediñ a-benn degas ar re all d'ar feiz, dleet eo din kreñvaat ar re 'zo gwanik hag o devo ezhomm kement a nerzh da enebiñ ouzh ar bed.

Da-c'houde e pignin d'an Nefiv, met n'az lezin ket da-unan, Mamm. Gwel a rez ar ouel-mañ ? E-kreiz va diskaridigezh am eus diskoachet ur galloud burzhudaouüs evidout, a-benn reiñ dit ar c'hennerzh-se. Met ur burzhud all a ran evidout. Perc'henn e vezi din e-barzh ar Sakramant, ken gwirion ha ma oan d'ar mare-vezh m'am douges. Morse mui ne vezi da unan-penn. En devezhioù-mañ ez out bet er stuz-se.

Mui a-wel d'an Oberenn-dasprenañ e oa ret ivez ma vefe eus ar glac'har-se ac'h eus diwasket. Kalz a vezo dalc'hmat ouzhpennet ouzh an Dasprenadurezh, rak dalc'hmat e vezo krouet e-leizh eus ar Pec'hed. Va holl servijerion a c'halvin da gemer ar perzh-se en Dasprenadurezh. Te eo an hini a raio, hec'h-unan hepken, muioc'h eget an holl sent all a-gevret. En abeg da-se ivez e oa ret mat ma vefe eus an hir-se a zilezidigezh. Echu eo dezhi bremañ.

N'on mui disrannet diouzh an Tad. Te ne vi mui disrannet diouzh ar Mab. Hag ar Mab o vezañ ganit, eo hon Trielezh a zo dit.. Nefiv bev ac'hanout, e tougi war an douar an Drielezh etouez an dud hag e santelai an Iliz, te, Rouanezh ar Velegiezh ha Mamm ar gristenien. Da-c'houde, e teuin d'az kemer. Ha n'eo mui Me a vezo ennout met te ennon, em Rouantelezh, da lakaat kaeroc'h ar baradoz.

Bremañ, Mamm, emañ o vont kuit. Mont a ran da lakaat e-vurus ar Vari all. Da-c'houde, e pignan davet an tad. Ac'hano eo e teuin war-du ar re na gredont ket.

Mamm, din-me da bok e-giz bennozh ha dit-te va Feoc'h da chom ez kichen. Kenavo!"

Ha Jezuz a ya diwar wel, e-kreiz bannoù an heol o tis-kenn a-builh diouzh oabl seder ar beure.

Hervez Maria Valtorta: IL POEMA DELL' UOMO-DIO
Levrenn 10 -troet gant Maoris Ar C'hollo beleg



5
Pevare sul an Amzer Fask
kan mont-tre

Leun eo an douar gant karantez Doue, dre an Aotrou
Doue ez eo bet diazezet start an Neñvoù. Alleluia!

kempedenn

Doue hollc'halloudek ha peurbadel, renit ac'hanomp
d'al leveneziou peurbadus, evit ma c'hello deñved
dinerzh ho tropellad erruout el lec'h m'eo aet a-
raok dezho ar Mesaer nerzhus.

lennadenn gentañ - Pêr a zispleg d'ar re o deus o-
unan kondaonet Jezuz ez eo bet
distaolet ganto an Hini nemetañ a c'hall an dud
bezañ salvet drezañ.

A-ziavaez da Jezuz-Krist n'eus silvidigezh ebet.

LENNADENN EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL 4, 8-12

- 8 En deizioù-se, Pêr, leun eus ar Spered Santel, a lavaras :
* Pennoù-bras ar bobl, ha c'hwi Re-Gozh !
9 Ober a reer dimp hiziv goulennoù diwar-benn arvad hon eus graet d'un den
nammet hag e c'houlenner diganeomp penaos eo bet pareet.
10 Klevit eta, c'hwi holl, hag ivez pobl Israel a-bezh :
Dre anv hon Aotrou Jezuz-Krist a Nazared ez eo, an hini hoc'h eus staget
ouzh Kroaz hag en deus Doue lakaet da sevel a-douez ar re varv,
ya, en anv hennezh eo en em ziskouez an den-mañ dirazoc'h, yac'h ha
divac'hagn.
11 Ar (Jezuz-se) eo ar maen distaolet kuit ganeoc'h-c'hwi, saverion-an-ti, hag
hag a zo deuet da vezañ maen-korn.
12 hag en hini all ebet n'emañ ar silvidigezh
rak n'eus anv all ebet dindan an oabl a gement a zo bet roet d'an dud
hag a zlefemp bezañ salvet drezañ.

SALM 117, 1 & 8-9, 21-23, 26 & 28cd & 29

22 AR MAEN TAOLET KUIT GANT AR VASONERION
'ZO DEUET DA VEZAN MAEN-KORN.
pe ALLELUIA.

- 1 Lavarit bennozh da Zoue, rak mat eo,
Rak peurbadus eo e garantez.
8 Gwelloc'h en em repuiñ en Aotrou
Eget fiziout en den.
9 Gwelloc'h en em repuiñ en Aotrou
Eget fiziout er briñsed.

Pevare sul an Amzer Fask

- 21 Ho trugarekaat a ran, rak va respontet hoc'h eus
Ha roet din an trec'h.
22 Ar maen taolet kuit gant ar vasonerion
'Zo deuet da vezañ Maen-korn.
23 A-berzh an Aotrou eo bet graet se
Tra vuzhudus dirak hon daoulagad.
26 Benniget an hini a zeu en anv an Aotrou,
Benniget ra viot eus Ti an Aotrou.
28 Va Doue ez oc'h, bennozh a lavaran deoc'h,
Va Doue, mil ha mil meuleudi deoc'h.
29 Lavarit bennozh da Zoue, rak mat eo
Rak peurbadus eo e garantez.

eil lennadenn - Liammet ouzh ar C'hrist e teuomp
da vezañ bugale da Zoue hag ez omp
asur da berzhiañ, un deiz, en e c'hlod.

En e garantez evidomp, Doue en deus graet ganimp e vugale.

LENNADENN EUS LIZHER KENTAN AN ABOSTOL SANT YANN 3, 1-2

- Va re vuiañ-karet !
1 Gwelit pegen bras eo ar garantez en deus diskouezet en hor c'heñver :
Anvet omp bugale da Zoue,
ha bez 'ez omp e gwirionez
Setu amañ perak n'e c'hell ket ar bed anaout ac'hanomp
dre n'en deus ket anavezet Doue.
2 Va re vuiañ-karet,
a-benn bremañ ez omp bugale da Zoue;
met n'en em ziskouez ket petra a vezimp;
met hen gouzout a reomp p'en em ziskouezo e vezimp hañval ouzh (Doue)
rak her gwelout a raimp evel m'emañ.

Yn 10, 14 Alleluia !
Me eo ar mesaer mat,
Ene an Aotrou
Hag anaout a ran va deñved-me
Ha va re-me am anavez.
Alleluia !

AVIEL Ar Pastor Mat a io e vuhez evit e zeñved.

LENNADENN EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT YANN 10, 11-13

7
Pevare sul an Amzer Fask

- 11 En amzer-se e lavaraz Jezuz : « Me eo ar Pastor mat.
Ar pastor mat a ro e vuhez evit e zeñved.
- 12 Met ar gopread, an hini n'eo ket ar pastor,
ha n'eo ket an deñved dezhan,
pa wel ar bleiz o tont,
a zilez an deñved hag a dec'h;
hag ar bleiz a dap krog enno hag o distaol a bep tu,
rak ur gopread n'eo ken ha n'eo ket nec'het gant an deñved.
- 13 Me eo ar Pastor mat;
hag anaout a ran va deñved-me,
ha va re am anavez.
- 15 Evel ma'z anavezan an Tad
ha ma'z anavez an Tad ac'hanon ;
ha va buhez a roan evit va deñved.
- 16 Deñved all am eus ha n'int ket eus ar c'hloz-mañ;
ar re-se ivez eo ret din o degas e-barzh;
(ha) va mouezh a glevint
hag e vo neuze ur bagad hepken, ur pastor hepken.
- 17 Setu amañ perak e kar an Tad ac'hanon :
dre ma roan va buhez
evit he c'hemerout a-nevez.
- 18 Den ebet n'he dilam diganin, met he reiñ a ran ac'hanon va-unan.
Ar galloud am eus d'he reiñ
hag ar galloud d'hec'h adkemerout :
hennezh eo ar gourc'hemenn am eus bet digant va Zad. »

war ar profoù

Plijet ganeoc'h, ni ho ped, Aotrou Doue, reiñ dimp ar c'hras da vevañ el levnez dre nerzh ar Misterioù-mañ a zegas da soñj eus Pask hor Salver, evit ma c'hello an Aberzh a vez kinniget hep paouez evit silvidigezh ar bed bezañ evidomp marmenn a levnez diziwezh.

rak-kanenn veur (prefas)

E gwirionez, Tad Santel, Doue hollc'halloudek ha peurbadel, un dra reizh ha dleet eo ho trugarekaat e pep lec'h hag e pep amzer, met dreist-holl ha gant brasoc'h meuleudi, en amzer santel-mañ raz eo bet Jezuz, hon Oan-Pask, laket d'ar marv evidomp.

Pevare sul an Amzer Fask

Rak o kinnig e Gorf war ar Groaz en deus evel-se degasetda wir holl aberzhioù al Lezenn gozh, hag ouzh en em reiñ e-unan deoc'h-c'hwi evit hor silvidigezh en deus diskouezet e oa war un dro Beleg, Aoter hag Oan an Aberzh. Rak-se, gant gouelioù santel Pask, e trid ar bed a-bezh en ur mor a levnez hag holl Speredoù galloudus an Neñvoù a gan meuleudi d'ho kloar, en ur lavarout da viken...

rak-kanenn ar c'heduniñ (antifonenn ar gomunion)

Adsavet eo ar Pastor Mat en devoa roet e vuhez evit e zeñved hag en devoa teurvezet mervel evit e dropell.

pedenn goude keduniñ

Taolit ur sell a garantez, Aotrou Doue, war zenved ho tropell ha peogwir hoc'h eus o salvet dre Wad prizius ho Mab, plijet ganeoc'h o lakaat da ziskui-zhañ da virviken e pradoù glas ar Baradoz.



Pempvet sul an Amzer Fask

kanenn mont-tre Salm 97/1-2

Kanit d'an Aotrou ur c'hantig nevez, rak traoù burzhudus en deus graet an Aotrou Doue: dirak ar pobloù en deus diskuilhet e reizhder. Allelouia!

kempedenn

Aotrou Doue, c'hwi eo hoc'h eus hon dasprenet ha graet ganimp ho pugale, taolit eta ur sell a vadelezh war ho pugale garet, evit m'o devezo, pa gredont e Jezuz Krist, ar gwir frankiz hag ivez an he-rezh peurbadus.

lennadenn gentañ - Un diaes a zegemer a zo bet roet da Baol, goude e gantroidigezh, gant Iliz Yerousalem. Gwirion e oa avat ar gantroidigezh-se. Paol a oa un diskibl birvidik ha prezeg a rae gant startijenn.

Paol o kemerout e renk e-touez an Ebestel.

LENNADENN EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL 9, 26-31

- 26 En deizioù-se pa voe erruet e Jeruzalem, Saoul a glaskes en em doueziañ
(unaniñ) gant an diskibion;
met holl o devoa aon razañ,
rak ne oant ket evit krediñ e oa un diskibl (d'ar C'hrist).
- 27 Neuze Barnabaz e gemeras gantañ hag ben-kasas d'an Ebestel;
hag e kontas dezho (ar pezh a oa bet tremenet);
Paol, war an hent, en devoa gwelet an Aotrou hag hemañ en devoa komzet
outañ; e Damask en devoa prezeget ganhardizhiegezh en anv Jezuz.
- 28 Adalek neuze, Paol a chome gant an Ebestel, o vont hag o tont e Jeruzalem;
hag e komze gant hardizhiegezh en anv an Aotrou.
- 29 Komz ha daelat (disputañ) gant ar c'hresianegerion,
met ar re-mañ a glaskes an tu da lemel e vuhez digantañ.
- 30 Met o vezañ gouezet kement-se, ar vreudeur hen ambrogas betek Kaezareaia,
hag a reas dezhañ loc'hañ etrezek Tarsoz.
- 31 An Iliz e-keit-se, dre Judea, Galilea ha Samaria a-bezh, a oa e peoc'h.
Sevel a rae e-giz un ti, ha bevañ e doujañs an Aotrou, ha gant kennerzh
ar Spered Santel ez ae war gresk.

SALM 21 26b-27, 28-30, 31-32.

26a A DRUGAREZ DEOC'H E KANIN MEULEUDI
E-TOUEZ AR BOBL EMOVDET. (er vodadeg vras)

Pempvet sul an Amzer Fask

- 26b Va gouestloù a sevenin dirak ar re hen douj.
27 Debrin a ray ar beorien o gwalc'h.
Hag e veulin an Aotrou, ar re a glask anezhañ...
« Bevet ho kalonoù da viken ! »
- 28 An douar a-bezh en devo soñj hag a zistroio d'an Aotrou.
Ha dirazañ e stouo holl familhoù ar pobloù.
- 30 Eñ hepken a vo azeulet gant tud vras an douar.
Dirazañ e plego ar re holl a ziskenn er bouldrenn.
- 31 Va ene a vevo evitañ
Va gouenn e servijo;
- 32 Brudet evit an Aotrou (Doue) d'ar rumadoù-da-zont,
E justis avo diskleriet d'ar bobl a vo ganet.

eil lennadenn - Sant Yann a atiz ar c'hristen feal da vezañ habask a spered. Bez e c'hell-eñ en em zerc'hel "divrall dirak Doue" ha pediñ gant ar surentez da vezañ selaouet.

Petra eo ar gwir garantez.

LENNADENN EUS LIZHER KENTAN AN ABOSTOL SANT YANN 3, 18-24

- 18 Va bugaligoù!
Na garomp ket dre gomz ha diwar beg hon teod,
met dre ober hag e gwirionez!
- 19 Oc'h ober evel-se ec'h anavezimp ez omp eus ar wirionez,
ha dirak Doue e vo hor c'halon e peoc'h;
ha pa zeufe
- 20 hor c'halon d'hon tamall,
rak Doue a zo brasoc'h eget hor c'halon, hag eñ a oar pep tra.
- 21 Va re vuiañ-karet! mar ne damall hor c'halon netra dimp,
hon eus fiziañs leun dirak Doue,
ha n'eus forzh petra a c'houlennomp hen resev a reomp digantañ,
dre ma viromp e c'hourc'hemennoù
ha ma reomp ar pezh a blij dezhañ.
- 23 Ha setu amañ e c'hourc'hemenñ:
krediñ en anv e Vab Jezuz hag en em garout an eil egile,
evel m'en deus gourc'hemenet dimp.
- 24 Hag an hini a vir e c'hourc'hemennoù a chom e Doue,
ha Doue ennañ; ha setu penaos ec'h anavezomp e chomomp ennañ:
dre ar Spered en deus roet dimp.

Pempvet sul an Amzer Fask

Yn 15 4-5b

Alleluia !

« Chomit ennon, ha me ennoc'h » eme an Aotrou
An hini a chom ennon a zoug kalz a frouezh

AVIEL Jezuz eo ar rezingenn (winienn) wirion ha ni ar brankoù.

LENNADENN EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT YANN 15,1-8.

En amzer-se e lavaras Jezuz d'e ziskibion :

- 1 « Me eo ar winienn wirion ha va Zad ar gwiniennour.
- 2 Kement skourr ennon ha na zoug ket a frouezh,
e lam anezhañ kuit, ha kement hini a zoug frouezh,
hen naetaat, hen kreinañ a ra, evit ma tougo muioc'h.
- 3 Dija ez oc'h naet, abalamour d'ar Gomz am eus lavaret deoc'h.
- 4 Chomit ennon ha me ennoc'h. Evel ne c'hell ket ar skourr dougen frouezh
anezhañ e-unan, mar ne chom ket stag ouzh ar winienn,
evel-se na c'hwi kennebeut mar ne chomit ket ennon.
- 5 Me eo ar winienn ha c'hwi ar skourrou.
An hini a chom ennon ha me ennañ, hennezh a zoug kalz a frouezh,
rak a-ziavaez din, ne c'hellit ober netra.
- 6 Met an neb na chomo ket ennon, a vo taolet er-maez evel ar skourr a zisec'h;
dastumet e vez ar re-mañ neuze ha taolet en tan hag e tevent.
- 7 Marchomit ennon, ha mar chom va c'homzoù ennoc'h,
goulennit kement a gerot, hag e resevot.
- 8 Ar pezh a ro gloar d'am Zad eo e tougfech frouezh e-leizh
ha ma vefec'h (evel-se) va diskibion.

war ar profoù

Aotrou Doue, dre ar c'henwerzh santel m'eo an a-berzh-mañ, hoc'h eus graet dimp kaout lod en ho natur-Doue, c'hwi an Doue meurbet-uhel ha Doue neme-tañ, roit dimp ar c'hras, ni ho ped, neket hepken da anaout ho kwirionez evel ma reomp endev, met ivez d'he zizhout, dre ur vuhez vat.


rak-kanenn ar c'heduniñ (antifonenn ar gomunion)

Me eo ar winienn wirion ha c'hwi ar skourrou, eme hor Salver, an hini a chom ennon ha me ennañ, hennezh a zoug kalz a frouezh. Alleluia!

goude keduniñ

Pempvet sul an Amzer Fask- C'hwec'hvet sul

Skoazellit ho pobl, gant madelezh, Aotrou Doue, ha peogwir hoc'h eus magañ anezhañ gant Sakramant Santel an Aoter, grit dezhañ dilezel an traoù kozh evit tizhout ar vuhez nevez.



C'hwec'hvet sul an Amzer Fask

kanenn-mont-tre

Gant kriadennoù a levez, embannit ar c'heloù, ma vo klevet! Embannit anezhañ betek ar penn all eus an douar: an Aotrou Doue en deus dieubet e bobl.

kempedenn

Doue hollc'halloudek, an deizioù-mañ a levez en dremenomp en enor d'hor Salver oc'h adsevel a varv da vev, roit dimp ar c'hras d'o lidañ (d'o berzañ) gant aked ha karantez, en doare m'en em ziskouezo bepred en hon oberoù ar pezh a adtremenomp warnañ dre soñj hor spered.

lennadenn gentañ - An dodenn yannel: Karantez eo Doue a zo lakaet war wel e testennoù ar sulvezh-mañ. Mont a ra Pêr da wela-denniñ ar c'hantener Kornelius: ar Spered a garg gant e roadoù ar pagan-se hag e diad a-bezh. Pezh a laka anat ez eo kinniget karantez Doue d'an holl dud, hep diforc'h ebet.

C'hwec'hvet sul an Amzer Fask

Ar baganed kentañ badezet, en o zouez Kornelius an ofiser roman.

LENNADENN EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL 10, 25-26, 34-35, 44-48.

- 25 (P'en em gavas Pêr e Kaezaria, e ti Kornelius, ur c'hantener eus an arme roman,) e teuas hemañ d'e ziarbenn, hag e kouezhas e-harz e dreid hag e stouas dirazañ.
- 26 Met Pêr a reas dezhañ sevel en ur lavarout :
- « Chom ez sav; rak ne don va-unan nemet un den ivez. »
- 34 Neuze e komzas Pêr ouzh ar re a oa bodet eno hag e lavaras :
- « E gwirionez, kompren a ran ne sell ket Doue ouzh diavaez an dud; met e kement bro a zo, an neb en deus doujañs evitañ hag a ra ar pezh a'zo just, a zo deuet mat gantañ
- 44 Edo c'hoazh Pêr o lavarout ar c'homzoù-se, pa gouezhas ar Spered Santel war ar re holl a selaoue ar Gomz.
- 45 Sabatuet e chomas an holl gredourion, ar re a ouenn ar Yuzevion hag a oa deuet gant Pêr, (o welout) e oa bet skuilhet zoken war ar Baganed donezon ar Spered Santel.
- 46 Rak o c'hlevout a raent o komz yezhoù hag o kentañ braster Doue.
- 47 Neuze e lavaras Pêr c'hoazh :
- « Daoust hag e c'hell unan bennak nac'h dour ar Vadeziant ouzh ar re o deus resevet ar Spered Santel kenkoulz ha ni ? »
- 48 Hag e roas urzh d'o badeziñ en anv Jezuz-Krist.
Neuze e pedjont anezhañ da chom ganto un nebeut deizioù.

SALM 97, 1, 2-3ab, 3cd-4

FR 2b DIRAK AR POBLOU EN DEUS AN AOTROU
DISKLERIET E SILVIDIGEZH.

- 1 Kanit d'an Aotrou ur c'hantik nevez
Rak traoù burzhudus en deus graet
An trec'h en deus roet dezhañ e zom dehoù
Hag e vrec'h santel.
- 2 Diskuliet en deus an Aotrou e silvidigezh
Dirak ar pobloù en deus diskleriet e reizhded.
3a Soñj en deus bet eus e vadelezh hag eus e fealded
3b E-heñver Israel.
- 3c Gwelit o deus holl bennoù an douar
3d Silvidigezh hon Doue.
4 Youc'hit d'an Aotrou, douar a-bezh
A-bouez-penn, gant safar ha soniri.

C'hwec'hvet sul an Amzer Fask

eil lennadenn - Yann a lid Doue hag a zo Karantez ha marmenn a garantez hag en deus roet e Vab evit distaol ar pec'hedoù.

Doue ! karantez eo !

LENNADENN EUS LIZHER KENTAN AN ABOSTOL SANT YANN 4, 7-10

- 7 Va re vuiñ-karet,
En em garomp an eil egile, rak ar garantez a zeu eus Doue,
ha kement hini a gar a zo bugale da Zoue, ganet gantañ,
hag a anavez Doue.
- 8 An hini na gar ket
n'anavez Doue,
rak Doue, karantez eo !
- 9 Setu amañ penaos en deus Doue diskouezet e garantez en hor c'heñver :
Degaset en deus Doue e Vab Unganet er bed,
evit ma hor befé ar vuhez drezañ.
- 10 Amañ emañ an dalc'h 'vit pezh a sell ar garantez : n'eo ket ni hon eus karet
Doue; met en eo en deus hor c'haret hag en deus degaset e Vab evel sakrifis
a-beoc'h evit hor pec'hedoù.

Yann 14, 23 Alleluia !
Ma'z eus unan bennak hag am c'har
Va c'homz a'virò;
Ha va Zad hen karo
Hag e teuimp daveñtan.
Alleluia !

AVIEL En em garit an eil eus m'am eus me ho karet.

LENNADENN EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT YANN 15, 9-17

- En amzer-se e lavaras Jezuz d'e ziskibion :
- 9 « Evel m'en deus va Zad va c'haret,
eyel-se ivez am eus ho karet.
Chomit em c'harantez.
- 10 Mar mirit va gourc'hemennoù, e chomit em c'harantez
evel m'am eus me miret gourc'hemennoù va Zad, ha ma choman e
garantez.
- 11 An traoù-se am eus lavaret deoc'h evit ma vezo va levenez ennoc'h,
ha ma vezo leun ho levenez.
- 12 Hemañ eo va gourc'hemenn-me : en em garit an eil egile, evel
m'am eus ho karet.

C'hwec'hvet sul an Amzer Fask

- 13 N'en deus den brasoc'h karantez eget homañ :
reñ e vuhez evit e vignoned.
- 14 Va mignoned ez oc'h-c'hwil, Mar grit ar pezh a c'hourc'hemennan deoc'h.
- 15 Ne roan ken deoc'h an anv a servijerion,
rak ar servijer ne oar ket petra a ra e vestr;
deoc'h em eus roet an anv a vignoned,
rak kement am eus klevet digant va Zad
am eus roet da anaout deoc'h-hu.
- 16 N'eo ket c'hwil hoc'h eus va dibabet;
me eo am eus ho tibabet,
hag ho liäezet,
evit ma'z eot war-raok
ha ma tougot frouezh ha ma chomo ho frouezh
evit ma roio deoc'h va Zad kement a c'houlennot
em anv digantañ.
- 17 Ar pezh a c'hourc'hemennan deoc'h eo en em garout an eil egile.

war ar profoù

Ra savo davedoc'h hor pedennoù, Aotrou Doue, a-unan gant ar profoù a ginnigomp deoc'h, evit ma c'hellimp, ur wech glanaet hor c'halonoù gant ho kras vadelezhus, bezañ e stad da lidañ misterioù ho karantez vras.

rak-kanenn veur (prefas)

E gwirionez, Tad Santel, Doue hollc'halloudek ha peurbadel, un dra reizh ha dleet eo ho trugarekaat e pep lec'h hag e pep amzer, met dreist-holl ha gant brasoc'h meuleudi, en amzer santel-mañ maz eo bet Jezuz Krist, hon Oan-Pask, laket d'ar marv evidomp. Drezañ, e vez ganet d'ar vuhez peurbadel Bugale ar sklerijenn, ha d'an dud a gred ennañ e vez digoret dorioù palez an Neñvoù. Rak hor marv-ni a zo bet dasprenet gant e Varv dezhañ e-unan, ha paz eo bet adsavet d'ar vuhez ez eo bet adsavet an holl dud d'ar vuhez. Rak-se, gant Gouelioù santel Pask, e trid ar bed a-bezh en ur mor a levenez, hag holl Speredoù gallodus an Neñvoù a gan meuleudi

C'hwec'hvet sul an Amzer Fask - Yaou-Bask

d'ho kloar, en ur lavarout da viken:

rak-kanenn ar c'heduniñ

Ma karit ac'hanon, e virot va gourc'hemennoù, eme hor Salver, ha me a bedo an Tad, hag Eñ a roio deoc'h ur Frealzer all evit ma chomo ganeoc'h da viken. Alleluia! Yn 14/15-16

goude keduniñ

Doue hollc'halloudek ha peurbadel, dre hor Salver o sevel a varv da vev e rentit dimp ar vuhez peurbadel, kreskit ennomp frouezh mister Pask ha silit en hor c'halonoù nerzh ar boued (bevañs-vagadurezh)-mañ a ro silvidigezh.



YAOU-BASK

kanenn-mont-tre

Tud a C'halilea, perak ez oc'h souezhet hag e chomit da sellout ouzh an Neñv? Evel m'hoc'h eus gwellet Jezuz o sevel d'an Neñv, evel-se e teuo en dro. Alleluia ! (Oberoù 1/11)

kempedenn

Doe hollc'halloudek, plijet ganeoc'h kargañ hor c'halonoù a levez santel hag a anaoudegezh-vat, rak hor Salver o pignat d'ar Baradoz a sach ac'h-anomp war e lerc'h, ha peogwir ez eo aet-tre en ho kloar evel ar Penn, e ro esperañs dimp-ni hag a zo izili e Gorf, da vont d'al lec'h m'emañ e-unan.

lennadenn gentañ - Oberoù an Ebestel a zanevell dimp an darvoud gwelus m'eo bet an Ebestel testoù anezhañ: Jezuz o pignat d'an Neñv Ha se goude emgav diwezhañ an Dasorc'had gant e ziskibion.

Jezuz o pignat d'ar baradoz

LENNADENN EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL 1, 1-11

- 1 Va levr kentañ am eus savet, o Teofiloz, diwar gement en deus graet Jezuz ha kelennet, adalek ar penn-kentañ,
- 2 betek an deiz ma voe savet d'an neñv, goude bezañ roet e irzhioù, dre ar Spered Santel, d'an Ebestel en devoa dibabet
- 3 D'ar re-mañ ivez en em ziskouezas bev, goude e Basion, dre galz a verkoù, (rak) e-pad daou-ugent devezh ec'h en em roas da welout dezho, hag e komzas ganto diwar-benn traoù Rouantelezh Doue.
- 4 E-kerz ur pred hag a gemere ganto, e c'hourc'hemennas dezho chom hep pellaat diouzh Jeruzalem, met gorloz eno ar pezh en devoa an Tad prometet :
« Ar bromesa, emezañ, hoc'h eus klevet ac'hanon o komz anezhi : Yann en deus badezet gant dour, met c'hwï a vo badezet er Spered Santel a-benn un nebeut deizioù amañ ! »
- 6 Int-i eta o vezañ dastumet en-dro dezhañ, a c'houlennas digantañ :
« Aotrou, daoust ha d'ar c'houlz-mañ eo emañ o vont da adsevel ar Rouantelezh evit Israel ? »
- 7 Met en a lavaraz dezho :
« N'eo ket deoc'h-hu eo anaout an amzerioù nag ar c'houlzioù en deus an Tad merket dre e c'halloud e-unan ; met nerzh a resevot dre ar Spered Santel diskennet warnoc'h, hag e viot testoù din e Jeruzalem hag e Judea en he fezh, hag e Samaria ha betek ar penn pellañ eus an douar. »
- 9 Goude bezañ komzet evel-se, e-keit ha m'edont o sellout, e voe savet d'an nec'h ;

- hag ur goumoulenn e lamas a-zindan o daoulagad.
- 10 Hag evel m'edont o sellout pizh war-zu an neñv, e-pad ma save (Jezuz) d'an nec'h, setu m'en em gavas en o c'hichen daou zen gwisket e gwenn.
 - 11 Ar re-mañ a lavaraz :
« Tud a C'halilea, perak e chomit-hu aze da sellout ouzh an nenv ?
Ar Jezuz-se hag a zo bet savet diganeoc'h d'an neñv, a zistroio en hevelep doare ha m'hoc'h eus hen gwelet o sevel d'an neñv. »

SALM 46 (47) 2-3, 6-7, 8-9.

- 6 PIGNAL A RA DOUE E-KREIZ AR SONIRI
AN AOTROU OUZH TROUZ AN TROMPILHOU.
- 2 Holl bobloù, strakit ho taouarn
Youc'hit evit an Aotrou a-bouez-penn.
- 3 Rak an Aotrou a zo uhel-meurbet,
Roue bras war an holl bobloù.
- 6 Pignal a ra Doue e-kreiz ar soniri,
An Aotrou ouzh trouz an trompilhioù.
- 7 Telennerion ! evit an Aotrou, sonit !
Sonit d'hon roue, sonit !
- 8 Rak roue an douar a-bezh eo Doue
Sonit ur meulgan !
- 9 Ren a ra Doue war ar broioù,
Doue en e goudez war e dron santel !

eil lennadenn - Ar C'hrist a bign betek barr an Neñvoù. Setu an darvoud diwelus: an Aotrouniezh hollvedel roet d'ar Mab distroet da gichenn e Dad. Hag ar c'hristen eo e blanedenn dezhañ kejañ gantañ, Eñ Penn an denelezh ha Penn ar C'horf nemetañ maz eo an Iliz.

« Jezuz-Krist roue ar bed-holl, en tu dehoù d'e Dad »

LENNADENN EUS LIZHER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENION EFEZOZ
Breudeur ! 1, 17-23

- 17 Plijet gant Doue hon Aotrou Jezuz-Krist, an Tad leun a c'hloar,
reiñ deoc'h ur spered a furez hag a zizoaldir evit e anavezout ervat.
- 18 Plijet gantañ sklerijennañ daoulagad ho kalon d'ober deoc'h kompren
petra eo an esperañs ez oc'h galvet da gaout,
petra eo ar c'hloar hep priz eus an hêrezh (heritañ) a ginnig deoc'h e-touez
e bobl santel,

hag ar vrasted dreist-muzul eus e c'halloud en hor c'heñver-ni
hag a gred ennañ.

Hennezh eo ar galloud kreñv ha nerzhus en deus

20 lakaet en implij en (Aotrou) Krist,

p'en deus graet dezhañ sevel a-varv da vev

ha p'en deus hen lakaet da azezañ en tu dehoù dezhañ en neñvoù.

21 Hen lakaet en deus a-us da bep gouarnamant ha beli,
a-us da bep gallout ha mestroni, a-us da gement titl a c'heller lavarout,
neket hepken er bed-mañ, met zoken en hini da-zont.

22 Lakaet en deus pep tra d'indan e dreid,

hag hen roet evel penn-meur d'an Iliz a zo e Gorf,

23 an Iliz hag a zo ar Peurlouder eus an hini a leugn pep tra en holl d'an holl.

Mzh 28 19 & 20 Alleluia !
It eta, kelennit an holl vroadoù,
Ha setu m'emaon ganeoc'h bemdeiz
betek Jun ar bed !
Alleluia !

AVIEL Jezuz o reiñ urzhioù diwezhañ d'e Ebistel hag o pignat d'an neñv.

AR FIN EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SAN I MARK 16, 15-20

En amzer-se (Jezuz o'n em ziskouez d'an Unneg) a lavaras dezho :

15 « It dre ar bod holl hag embannit ar C'heloù-Mat d'an holl grouadelezh.

16 An hini a gredo hag a vo badezet a vo salvet,
an hini na gredo ket a vo kondaonet.

17 Setu ar sinioù a heulio ar re a gredo :

em anv e kasint an diaouled kuit,
yezhoù nevez a gomzint,

18 en naered e krogint,

ha mar evont ur c'hontamm (poezon) marvus bennak ne raio droug ebet dezho,

war ar re glañv ec'h astennint o daouarn,

hag e vezint yac'haet »

19 An Aotrou Jezuz goude komz outo, a voe savet o an nenv n'ag
a yeas da azezañ en tu dehoù da Zoue.

Evito avat, mont a rejont da brezeg dre-holl, an Aotrou o kenlabourat ganto
hag o reiñ nerzh d'ar Gorn dre ar sinioù a heulie anezhi.

*Mark a stroll an daou zarvoud gwelus ha diwelus en ur pennreo-
lun verr (formulenn) a zo bet miret gant an Iliz ha lakaet e-
barzh ar Gredo.

war ar profoù

Evit enoriñ ho Mab Jezuz o pignat d'ar Baradoz, e
kinnigomp deoc'h, Aotrou Doue, gant ur galon izel, an
Aberzh-mañ, plijet ganeoc'h eta, dre ar marc'had
santel-mañ, m'eo an Oferenn, treiñ hor seloù etre-
zek traoù an Neñvoù.

rak-kanenn veur (prefas)

E gwirionez, Tad Santel, Doue hollc'halloudek ha
peurbadel, un dra reizh ha dleet eo ho trugarekaat
e pep lec'h hag e pep amzer. Rak hor Salver Jezuz
Krist, Roue a c'hloar, trec'hour war ar marv hag ar
pec'hed, a zo savet, an deiz-mañ, dirak seloù soue-
zhet an Aeled, betek lein ar Baradoz, evel Hanterour
etre Doue hag an dud, Barnour ar bed ha Mestr war
bep tra. Ha ma ra kement-se, n'eo ket evit pellaat
diouzh hon stad dister-ni, met evit reiñ dimp-ni, i-
zili e Gorf, an esperañs da vont, un deiz, d'al lec'h
m'eo aet en hor rack an Hini a zo hor Penn ha mam-
menn pep gras evidomp. Rak-se, gant gouelioù santel
Pask, e trid ar bed a-bezh en ur mor a levez hag
holl Speredoù galloudus an Neñvoù a gan meuleudi
d'ho kloar, en ur lavarout da viken:


rak-kanenn ar c'heduniñ (antifonenn ar gomunion)

Setu m'emaon ganeoc'h bemdeiz, betek diwezh ar bed.
Allelouia ! Mzh 28/20

goude keduniñ (pedenn goude komuniañ)

Doue hollc'halloudek ha peurbadel, tra m'emaomp
c'hoazh war an douar e roit dimp ar c'hras da ga-
out darempred gant traoù an Neñv, plijet ganeoc'h
eta, treiñ karantez hor c'halonoù etrezek al lec'h
m'emañ ganeoc'h hon natur-den.





kanenn mont-tre
Selaouit, Aotrou Doue,
ouzh va mouezh.
O c'hervel emañ!
Din-me e lavar va c'ha
lon: Klask e Fas. Ho
Fas, Aotrou Doue, eo a
glaskan. Na guzhit ket
ho Tremm ouzhin.
kempedenn

Selaouit, gant madelezh
hor pedennoù, Aotrou
Doue: evel ma kredomp
emañ gadeoc'h en ho
kloar, Jezuz, Salver ar
bed, grit dimp ivez
kompren e chom ganimp-
ni betek diwezh ar bed
evel m'en deus prome-
tet e-unan.

lennadenn gentañ
- Mazeaz a zo dibabet
e-lec'h Judaz, e kembod
an Daouzek. Ur sell
diwezhañ war buhez ar
gristenien gentañ e
keduniez Jeruzalem.

Mazeaz (Matiaz) dibabet da abostol e-lec'h Judaz.
LENNADENN EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL 1, 15-17.

15 En deizioù-se, en em lakaas Pêr en e sav e-kreiz ar vreurdeur dastumet asamblez,
ur c'hwec'h-ugent bennak anezho, hag e lavaras :
16 « Breudeur ! Ret e oa ma teuje da wir ar Skritur : Ar Spered-Santel dre c'henoù
David, en devoa komzet en a-raok diwar-benn Judaz, an hini a zeuas da vezañ

- heñcher ar re a grogas e Jezuz;
17 Bez'e oa koulskoude ar Judaz-se unan ac'hanomp, ha degouezhet e oa bet
dezhañ e lodenn eus hor ministrerezh (C'harig-ni)
20 Skrivet eo e levr ar Salmoù :
...Ra gemero unan all e garg.
21 Setu eta petra a zo d'ober :
Bez'ez eus gwazed hag a zo bet ouzh hon heul e-pad an holl amzer m'eo bet an
Aotrou Jezuz o vont hag o tont en hon touez,
22 adalek badeziant Yann
betek an deiz m'eo bet savet diganeomp.
Ret eo eta e teufe unan bennak anezho da vezañ test
asamblez ganeomp eus e zasorc'hidigezh.»
23 Kinnig a rejont daou ; Josef anvet Barsabaz ha Iesuanvet Justuz, ha Mazeaz.
24 Neuze en em lakjont da bediñ evel-hen :
« C'hwi, Aotrou, hag a anavez kalonoù an holl dud,
diskouezit dimp pehini eus an daou-mañ hoc'h eus dibabet
da gemer lod er ministrerezh hag er garg a abostol en deus Judaz dilezet
evit mont d'al lec'h m'eo aet.»
26 Tennañ a rejont plouzenn warno, hag e kouezhas ar blouzenn gant Mazeaz
a voe adalek neuze unanet gant an Unnek Abostol.

SALM 102 1-2, 11-12, 19-20ab.

- R/ 19 AN AOTROU, EN NENVOU EO STABIL E DRON. (pe ALLELUIA)
1 Bemig, va ene, an Aotrou,
Hag kement a zo emon, e anv santel,
2 Bemig, va ene, an Aotrou,
N'ankounac'ha hini eus e vadoberoù.
11 Rak evel m'emañ barr an neñvoù a-us d'an douar
Eo kreñv e garantez evit ar re o deus doujañs evitañ.
12 Keit ha m'emañ Sav-Heol diouzh Kuzh-Heol
E pella diouzhimp hor fazioù.
19 An Aotrou, en neñvoù, eo stabil e dron
Hag e rouantelezh 'n em led war bep tra.
20ab Bemig an Aotrou, c'hwi, e Aeled,
C'hwi, kalonek ha galloudus, a sent ouzh e urzhioù.

eil lennadenn- Amañ e kavomp adarre penndodennoù
Sant Yann: Karantez eo Doue ha ret

Seizhvet sul an Amzer Fask

chom kenunanet gant Doue, dre sevenifi ar gourc'hemenn a garantez.

« Anavezet hon eus garantez an Aotrou Doue »

LENNADENN EUS LIZHER KENTAN AN ABOSTOL SANT YANN 4, 11-16

- 11 Va re vuiañ-karet! P'en deus Doue hor c'haret kement,
e Neomp ni ivez en em garout an eil egile.
- 12 Doue, den ebet n'en deus biskoazh e welet,
met ni en em garomp an eil egile, Doue a chom ennomp
hag e garantez ennomp a zo peurc'hraet.
- 13 Dre gement-mañ ec'h ouzomp e chomomp ennañ hag Eñ ennomp
o vezañ ma re dimp eus e Spered.
- 14 Ha ni hon eus gwelet hag e roomp testeni en deus an Tad degaset e Vab,
evel Salver ar bed.
- 15 Anneb piv bennak a anzav ez eo Jezuz Mab Doue,
Doue a chom ennañ hag eñ e Doue.
- 16 Ha ni a anavez ar garantez en deus Doue en hor c'hevver
hag enni e kredomp,
Doue, garantez eo, an hini a chom er garantez
a chom e Doue ha Doue a chom ennañ.

Yn 14, 15 Alleluia!
N'ho lezit ket emzivadeg,
Ene an Aotrou,
Mout a ran kuit hag e tistroin davedae'h
Hag e vo laouen ho kalon.
Alleluia!

AVIEL « Padon divezhañ Jezuz evit e kristiñion, konsakriñ santelaat anezho er wirionez »

LENNADENN EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT YANN 17, 11-18

- En amzer-se, Jezuz o vezañ savet e zoublagad war-zu an neñv a lavaras
11 « Tad Santel, miy anezho din c'halloud da anv ac'h eus met din,
evit ma vezint unan eveldomp.
- 12 P'edon ganto, me o eure dre c'halloud da anv ac'h eus roet din,
o miret em eus hag hini anezho n'eo aet da goll nemet an hini a oa
da vezañ kollet evit ma vije sevenet ar Skriver.
- 13 Ha bremañ ez an davedout, hag an trap-se a lavarañ tra m'emañ er bed,
evit ma o devezo va levezeg enno, en ha leunder (an he teuz).
- 14 Roet em eus dezho da Gouz e donezon,
hag ar bed en deus kemeret kasoni outo,
dre ne dint ket eus ar Bed evel ne don ket va-unan eus ar Bed.

Seizhvet sul an Amzer Fask

- 15 Ne c'houberenn ket digant o zennad eus ar Bed,
met o miret dezho an draeg.
- 16 Ne dint ket eus ar Bed, evel ne don ket va-unan eus ar Bed
Konsakri anezho er wirionez,
da lavar-te a zo gwirionez.
- 17 Evel m'ac'h eus va degaset d'ar Bed, ma ivez em eus o c'haset d'ar Bed
18 Hag evit en em gonsakriñ va-unan evit ma vezint int ivez
konsakriñ e gwirionez ».

war ar profoù

Ra zeuto, ni ho ped, Aotrou Doue, an aberzh-dinann
mañ d'hor glanaat ha da reiñ d'hon ennoñ nerzh ho
kras douerl.


rak-kannenn ar c'heduniñ

N'ho lezit ket emzivadeg, ene hor Salveridont a rin
d'ho kaout hag e vo lein ho kalon a levezeg. Alle-
luia! Yn 14/16, 16/22

goude keduniñ

Skoczellit ho pobl gant mdelezh, ni ho ped, Aotrou
Doue, hag ar re hoc'h eus maget gant Mister santel
an Aotrou, grit dezho dilezel an traoù kozh en ho
c'hreiz evit ren ar vuhez nevez.

rak-kanenn ar Yaou-Bask pajenn 20 (prefas p. 20)



PEDENN-EMZILEZEL

E-KEÑVER HON TAD EUS AN NEËV

Da Jezuz, an Aotrou Krist bev,
en em ouestlan.
E-keñver youl Doue en em zilezan penn-da-benn.

Kinnig a ran da Zoue, va Zad eus an neñv,
va buhez en he fezh, evel m'emañ-hi o vont en-dro,
gant ar mareoù laouen
hag ar poanioù anezhi,
pe e teu ar re-mañ din eus va ferzh va-unan,
pe a-berzh ar re all,
pe a-berzh an degouezhioù.

Kentoc'h eget fiziout war ar strivoù va-unan,
pe war un harp bennak a-berzh tud,
e fell din en em lezel da vezañ aozet e pep doare,
ouzh en em lezel da vezañ mezet ha stummet
gant daouarn Doue ragevezhiek,
gant youl hon Tad eus an Neñv,
houmañ o tremen alies-bras dre youl ar re all.

Ra soublo an Aotrou Doue, gant trugarez,
war-du ar bedenn-mañ o tont eus ur galon baour.
Ra blijo gantañ lakaat
ha diazezañ da-viken ar galon-se
d'ur paour war hent ar fiziañs uvel,
hent nemetañ ar garantez wirion
hag hep fallaenn.

* pedenn Urzh al liked kensakret en Iliz ha gant an Iliz, aotret
et d'an 28 a viz kerdu 1986 gant an Aotrou Madeg, eskob Toulon.
* troet gant M. ar C'hollo e 1988

LENNADURIOU DIWAR AR BREVTAL
troet gant an Aotrou KLEERG

PEVARE SUL GOUDE PASK

Eil lennadenn: tennet eus HOMILIENNOU SANT GREGOR
VEUR WAR AN AVIELOU. (Hom. 14, 3-6: PL 76, 1129-1130)

"Ar C'hrist, pastor mat"

"Me eo ar Pastor mat, hag anavezout a ran va
deñved - da lavarout eo, o c'harout a ran - ha va
re-me am anavez" (Yn. 10, 14). Evel pa lavarfe sklaer:
ar re a gar a zo sentus. Ya, rak neb na gar ket ar
wirionez, ne oar ket c'hoazh tamm ebet petra eo.

P'hoc'h eus klevet, va breudeur muiañ-karet, e
peseurt riskl emamp-ni, soñjit ervat ivez e komz-
où an Aotrou, evit gout e peseurt riskl emao'h
hoc'h-unan. Gwelit hag-eñ emao'h e zeñved, gwelit
hag-eñ hen anavezit, gwelit hag-eñ ec'h anavezit
sklerijenn ar wirionez. Anaout a rit n'eo ket dre
ar feiz, met dre ar garantez. Anaout a rit a lavar-
an, n'eo ket diwar grediñ met diwar ober. Rak an
hini a lavar ar c'homzoù-se, Yann an Avielour, a
ro an testi-mañ: "Neb a lavar ec'h anavez Doue
ha na vir ket e c'hourc'hemenoù, ur gaouiad n'eo
ken" (1 Yn. 10, 15)

Setu perak e lavar Hor Salver kerkent goude:
"Evel maz anavez va Zad ac'hanon hag ec'h anavezan
me va Zad e roan va buhez evit va deñved". Evel pa
lavarfe sklaer: diwar gement-mañ eo anat ec'h ana-
vezan va Zad hag ez on anavezit gant va Zad, dre
ma roan va buhez evit va deñved. Da lavarout eo:
dre ar garantez a ra dimp mervel evit va deñved, e
tiskouezan pegement e karan va Zad.

Diwar-benn an hevelep deñved-se e lavar adarre:
"Va deñved a glev va mouezh ha me o anavez, hag e
teuont d'am heul, ha me a ro dezho ar vuhez peur-
badel". (Yn. 10, 14-16) Diwar o fenn en deus lavaret
un tamm uheloc'h: "Ma'z antre unan bennak drezon-
me, e vo salvet: mont a ray e-barzh, dont a ray
er-maez, hag e kavo peuriñ da lavarout eo antren a
ray evit kaout ar reiz, mont a ray er-maez eus ar
feiz d'ar gwelout, eus ar c'hrediñ d'an arvestiñ,
hag e kavo peurvanou er fest peurbadel.



E zeñved eta a gav peurvanoù rak kement den a ya d'e heul gant ur galon didro, a vez maget gant boued ar peurvanoù peurbadus. Petra eo evit gwir, peurvanoù an deñved-se, nemet joaioù diabarzh ar baradoz bepred glas. Rak peurvanoù an dud dibabet e^z e^o fas Doue, ha peogwir e vez gwelet fas Doue hep ehan, en devez an ene hep fin ebet, e walc'h eus boued ar vuhez.

Klaskomp eta va breudeur ker, ar seurt peurvanoù-se e-lec'h ma c'hellomp tañva joa ha levez, e-kreiz gouel kenvroidi dimp-ni ken illur.

Ra vo gouel ar re a zo e-kreiz al laouenedigezh ur gouviadenn evidomp. Broudomp eta hor c'halon, va breudeur, ra dommo hor feiz a-nevez ouzh ar pezh he deus kredet, ra vo entanet hor c'hoantoù evit an traoù eus an nec'h. Karout evel-se a zo dija mont en hent.

Arabat e teufe un drubuilh bennak d'hon distreiñ diouzh laouenedigezh ar gouel diabarzh. Pa fell da unan bennak mont d'ul lec'h dibabet gantañ hini ebet eus diaesterioù an hent ne ra dezhañ kemmañ e vennad. Arabat eta e teufe ar prospolite lubanus d'hon touellañ, rak diskiant e vefe ar beajour a chomfe da sellout ouzh ar pradoù bourrus kavet gantañ war e hent hag a ankounac'hafe da belec'h en devoa c'hoant da vont.

+++

PEVARE LUN GOUDE PASK

Eil lennadenn: tennet eus LEVR SANT BAZILEOZ ESKOB
WAR AR SPERED SANTEL (Cap. 15, 35-36; PG 32, 130-131)

Ar Spered eo a ro ar vuhez

An hini a reizh hor buhez, an Aotrou Doue, en deus skoulmet ganimp Emglev ar Vadeziant, emglev hag a zo ennañ Marv ha Buhez: an dour a zo skeudenn a varv, hag ar Spered a zo arrez a vuhez. A-c'hano eta ez eo sklaer evidomp ar pezh edod o klask, da lavarout eo, perak eo bet unanet an dour gant ar Spered. Peogwir e oa lakaet daou bal d'ar: distrujañ ar c'horf-a-bec'hed da herzel outañ da zougen frouezh evit ar marv, ha neuze diouzh an tu all ober dezhañ bevañ dre ar Spered, evit dougen frouezh a Santelezh. Skeudenn ar marv ez eo eta an dour a zo evel ur bez da resev ar c'horf.

Ar Spered avat a zo gantañ nerzh a vuhez: ad-neveziñ a ra hon eneoù ouzh o diframmañ eus marv ar pec'hed evit adreiñ dezho ar vuhez kentañ. Setu berr-ha-berr petra eo bezañ ganet eus an Dour hag eus ar Spered ivez, rak evit gwir e c'hoarvez ar marv en dour, hag e teu hor buhez diwar labour ar Spered.

Teir gwech e vez soubet an nen en dour ha teir gwech ivez e vez graet pedennoù evit seveniñ mister bras ar Vadeziant. Da gentañ evit ma vefe aroueziet ar marv, ha da c'houde evit ma vefe skleriet eneoù ar re a vadezer, dre reiñ dezho skiant Doue. Rak-se ma'z eus en dour ur vertuz bennak, n'eo ket eus natur an dour e-unan eo e teu met eus bezañs ar Spered. Evel ma ouzer "Resev ar Vadeziant n'eo ket bezañ gwalc'het eus ul loustoni bennak a gorf, met en em ouestlañ da Zoue gant ur goustiañs vat" (1 Pêr, 3, 21). Setu perak, an Aotrou Doue ouzh hor prientiñ d'ar vuhez-se hag a zo un dasorc'h, a oa e vennad ober deomp reizhañ hor buhez penn-da-benn, hervez an Aviel. Chom hep konnariñ, gouzañv ar poanioù gant pasianted, treiñ kein d'ar plijadurioù, bezañ distag diouzh an arc'hant, setu petra a c'hourc'hemenn Doue dimp. En hevelep doare ma tivizfemp start ouzhimp hon-unan ober dija ar pezh a aparchant ouzh ar bed da zont, dre natur. Dre ar Spered Santel e vez das-koret ar baradoz, e pigner da Rouantelezh an neñvoù, e vezer adlakaet e renk bugale Doue. Drezhañ hon eus hardizhegezh a-walc'h da reiñ an anv a Dad d'an Aotrou Doue; dont a reomp da gaout perzh e gras an Aotrou Krist, da vezañ anvet bugale ar sklerijenn ha da vezañ lodek er c'hlod peurbadel. Pe evit lavarout pep tra war un dro, da vezañ leuniet a bep seurt bennozhioù er bed-mañ hag er bed da zont. Evel en ur mellezour e welomp evel pa vefemp eno dija, ar madoù miret evidomp gant Doue hag emaoomp dre ar feiz en gortoz d'o fiaouañ un deiz. Pa'z eo evel-se eo emañ an arrez, petra ne vo ket eta an teñzor da gaout? Ha pa'z eo ken bras ar preveudioù petra ne vo ket pa en devo pep tra tizhet e leunder.

+++

JAKOB ECKER

BIBL AR VUGALE

Dibab a destennoù

eus
ar Bibl

Embannadur kinniget gant:
"Skoazell d'an Iliz en Dienez"

Nihil Obstat e Pont-Melvez, 26.06.86

J. Peron, Person

Imprimatur e Sant Brieg, 01.07.86

R. Eyen, Vikel Vras.

© Maoris Ar Chollo ha Kristenion Breizh evit an destenn vrezhonek
Embannadur skoazellet gant Skol Uhel Ar Vro.

© Patmos Verlag hag Editorial Verbo Divino
Embannadur kentañ en alamaneg : **Die kleine Bibel.**

Dessins **Johannes Grüger**, dans **Die kleine Bibel**, © Patmos Verlag, Düsseldorf, 1967
Moulet e Bro Spagn.

Imprime Mateu Cromo, S.A., 28320 Pinto (Madrid)

Depósito Legal. M. 17.428-1987

ISBN 84 7151 535 0

Edición en Bretón (Bbr)

E gwerzh el levrديوù brezhonek,
ha gant Kristenion Breizh,
Lez Hinog, Paimpont, 35380,
Priz: 25 lur gall.